



Liorzhoù Élise

Plijadur ar merc'hed war an oad

E-barzh ar gegin e Liorzhoù Élise eo bodet Édith, Josette, Anne ha Gabrielle (a gleiz da zehoù) a zo deuet da vezañ gwir gamaradezed, evit brasañ plijadur Aude (en he sav) a vez o sikour anezhe en o buhez pemdez.

An oad ne gont ket evit kenfeurmiñ ! E Ploufragan eo bet krouet Liorzhoù Élise, un ti boutin evit an dud war an oad, gant Aude Boyenval. En em staliet zo peder flac'h eno, ur pevar-ugent vloaz bennak anezhe, ha kanañ a reont meuleudi d'ar mod-se da vevañ a zegas ur sikour dezhe diouzh o ezhommoù ouzhpenn al lojeiz.

« War-dro ugent vloaz zo e felle din ober kemend-all. En deiz a hirie on laouen ken ec'h on rak kerzhet a ra an traoù evel ma oant bet soñjet en a-raok dres ! » Un tamm ouzhpenn bloaz war-lerc'h digoradur Liorzhoù Élise emañ Aude Boyenval e barr al levenez. Skoazel-lerrez sokial eo ha deuet eo a-benn da grouiñ un endro kalonek ha sur evit Josette, Gabrielle, Édith hag Anne, ar peder flac'h a zo o chom eno er mare-mañ. Pa c'h int en tu all da 80 vloaz n'int ket evit bevañ o-unan er gêr en ur mod dinec'h. Daoust ma oa bet ur mare start p'o doa ranket kuitaat o zi e lavaront o-feder o deus kavet ur vuhez plaen adarre e Liorzhoù Élise. « E-barzh ma jeu emañ amañ, eme Josette. Bep a studio hon eus, gant ur strinkerez. Ha graet e vez war hon zro gant Aude, dalc'hmat e vez o selaou ac'hanomp ha ne lavar ket nann gwech ebet... »

SIKOUR BEMDEZ EVIT KEMENT AVEZ

Hep mar na marteze he deus kavet Aude Boyenval ar c'hempouez mat evit aesaat d'he feurmourezed bezañ seder hag en o jeu. Bep a studio prevez o deus, dezhe da vezañ e peoc'h, war o fouezig, met bezañ zo lec'hioù boutin ivez (ar gegin, ar saloñs, al liorzhoù) ma c'hallont debriñ hag ober traoù all asambles, diouzh o c'hoant. « Amañ ne vez graet seurt ebet dre ret, a zispleg Aude. N'eus ket lakaet eurioù evit sevel pe mont da gousket, pep hini a ra ar pezh a gar, pa fell

dezhi, kemer perzh en oberoù pe chom hep ober. Evel er gêr. » War un dro gant se e kinnig Aude reiñ sikour dezhe diouzh o ezhommoù ha war al lec'h e vez e-pad an deiz. « Aze emañ an diferañs etre ni hag an tier evit tud war an oad a vez digoret amañ pe ahont. Ober a ran war-dro prenañ an diankajoù, naetaat, sikour an dud d'en em walc'hiñ, ambroug anezhe da di ar medisîn, prientiñ ar predoù, aozañ atalieroù pe pourmenadennoù, evel mont d'ar sinema lakaomp... Ha prest e vezan da respont dezhe e-pad an noz, e ken kaz. » Evit gallout ober kemend-all, a-hed an amzer, zo en em gavet div blac'h asambles gant Aude d'ober skipailh Liorzhoù Élise. Lañs zo gant ar mod-se d'ober, just a-walc'h : emañ o studiañ an traoù evit digeriñ daou di nevez evel-se, er memes lec'h, hag a vo degemeret pevar a dud e pep hini anezhe. Diwar neuze e c'hallfe Liorzhoù Élise kinnig servijoù nevez, evel degemer annezidi e-pad berr amzer pe kaout tud war al lec'h e-pad an noz. Da c'hortoz emañ Édith, Josette, Gabrielle hag Anne war-nes degemer ur genfeurmourez pe ur c'henfeurmour nevez, en ur bempvet lojeiz, muioc'h distag diouzh ar re all. « Pouezus-kaereo ar choaz a vogaet rak ret eo d'an traoù tremen eus ar c'hentañ gant ma feder flac'h, a anzav Aude. Sañset eo an dud da zont da chom amañ betek fin o buhez, gant-se eo gwelloc'h en em glevfent mat etreze... »

Evit he labour leun a vadelezh he doa bet Aude Boyenval, e fin 2022, priz ar juri da-geñver ar c'honkour Donezonoù Dispar en Aodoù-an-Arvor. Un toullad mat a embregerien zo dedennet-kaer gant ar pezh he deus savet ha gallout a rafent kemer skouer warni, d'ar re goshañ ac'hanomp neuze da gavout un diskoulm a-feson etre chom er gêr ha bezañ kaset d'un ti espres ●

Virginie Le Pape

